

# CHANSON COMPOSET

2, rue Joseph Morand  
Tél. 86.7.10.51 - 22300 LANNION

## VAR

# Sujet eun den Yaouank ag e Vamm ag e beder Mestrez

## Er Bloavez Mil Nao Chant Tri

(Var eun ton never)

A toe noad a dri bla  
Me oa mamet minor  
C'hoant a meus da ziskleria  
Eul loden deus ma sor.  
  
C'hoant meus da ziskleria  
Darn demeus ma bue  
P'hini meus tremenet  
Bete an de a c'hirie.  
  
Gant a derjen a gredan  
A oa marved va zad  
Ma mam a chom intanvez  
C'hi devoa kalonnad.  
  
Pa chom e intanvez  
Gant e sez krouadur  
He c'halon voa feblisset  
Gant an displijahdur.  
  
Seiz minor chome ganthi  
Deus a re yaouanka  
Ar c'hossa oa unneg vloa  
Me na oan nemet tri bla.  
  
D'ar c'houls e me oa yaouank  
Bian em jagkeden  
Alas me na ouien ket  
Petra ma da dremen.  
  
Deus ar beure pa saven  
Me mije kalonnad  
Pa deue da sonj din  
E oa maro va zad.  
  
Mes va mam leun a gourach  
Onnes am c'honsole  
Hi a lare din bemde  
Mije eur brago neve.  
  
Gred oa din eur brago  
O oa gret gant lien  
Evel ma oa ar c'his  
Gwechall gant ar bevien.  
  
Guisket ma ma brago  
Ed a oan da bourmen  
Soetet ma blavez mad  
D'an oll amezeienn dosta  
  
Bed a ma guenneien  
Bed a ma avalo  
Tout an dud a lare din  
A oa drol ma brago.  
  
Hennes oa eur brago  
Nan na oa ket gret prop  
Un anter demeus e fons  
A oa laket arok.  
  
Ar brago se oa gret  
Din, gant ma c'hoar kossa  
Ne oa ket kemeneres  
Ouie ket a dailla.  
  
Mes pa oun deut en oad  
Da roula ar yaouankis  
Me a ma bet eur brago  
Ag e oa deus ar c'his.  
  
Neuze me e bate  
Kemerre plijadur  
Ma zud mes a oa demeet  
Et gant o avantur.  
  
Demeet oa ma dri breur  
Demeet ma diou c'hoar

Eur breur a chome gane  
Da labourat ouar.  
Om diau chomomp n'ome m'mm  
Da serc'hel emenach  
Emesk al labpur, ar boan,  
An tempas ag an orach.  
  
D'an oadia tri vloach-h-yla  
Meus bet eun assidant  
A neus beuel ma c'halon  
En eur mor a journant.  
  
Neuze e meus sonjet  
Dont da chanc a vicher  
Rac ne oa ket deus ma grad  
Chom labourer douar.  
  
Ma sonjet voeaj  
A mont kuit deus ar guer  
O sonjal ober ma fortun  
Ebarz em ber arizer.  
  
Ne oan ket bet e skol  
Ma ket a ziskamant  
Ag an draze a d'in  
Fun tem diaz  
  
Prenet ma eur caeler  
Ag eul leurric buj,  
Ma disket skriava lenn  
Ac'hanoun va uran.  
  
Raktal en eun instant  
A oa deut em spred  
Ma c'hajen da vreaji  
E tiskjen ar galik.  
  
Ouijen skriava etenn  
A gout an daoulangach  
A gonit ma forlan  
Se zo eun avavach.  
  
Va mam pa deus klevet  
Hi a lare dime  
Petric emei meuguvel.  
Petric a sonjeste.  
  
Me meus dioed da dad  
Savet sez krouadur  
Te a c'he ma yaouanka  
Te re ma filijatur.  
  
Mar kes er m'es ar vro  
A dilesel ar vro  
Me vo oblige neuze  
Da verza ma mobilier.  
  
A goude kerfent-se  
Da belec'h ar himme  
Vin toled a distolet  
D'an eil ti deguile.  
  
Chom ganen tre ma vin beo  
Doue, roio d'lians  
Da ober affeiou mad  
Goude an abondans.  
  
Pa meus klevet va mam  
Gant e c'hoizo agreabl  
E strinkas an dero  
Demeus va daou lagad.  
  
Me o chaus a santimant  
O sonjal chom ganti  
A goude vije maro  
C'hajen da voeaj.

Va mam oa arri koz  
Alies vije klany  
Bet a deus eur c'blevet hir  
Eunek pe daouzek vloa.  
  
Aben daouzek vla goude  
Ma mam deu da vovel  
Gras ma mam er barados  
Er joayo eternel.  
  
Ma breudeur, ma c'hoarez  
Neuze deuas d'ar guer  
Da c'houlen o fartach  
Demeus ar mobilier.  
  
Gwersed oa ar mobilier  
Partajet an arc'hant  
A pebhini gant e lod  
A oa bet-guel kontant.  
  
Eur breur al ma er guer  
Assembles ganeme  
Ag henes pa demeet  
Aben eur mis goude.  
  
A mele sonjal neze  
P'laas c'hoas pol faouank  
Ma ruzen eur mai hadour  
E c'honejen arc'hant.  
  
Bet on marc'hadour fao  
Marc'hadour pabioles  
A marc'hadour piz glaz  
Marc'hadour patates.  
  
Marc'hadour avalo  
A marc'hadour boësson  
Anvet oan pot ar gist mad  
Bars en ker Lannion.  
  
Anvet oan pot ar gist mad  
Bars en ker Labuion  
Plassa ren domistiket  
En tier a fesson.  
  
Marc'hadour kos dillat  
So hanvet flipiri  
Onnes so'r vicher vad  
Nep a oar anezzi.  
  
An neb a bren marc'hadour  
A goude guerza ker  
Eres rafe e fortun  
Ebars en ber amzer.  
  
Bet on marc'hadour koat  
Marc'hadour plous pe glo  
Marc'hadour lunedo  
A marc'hadour moncho.  
  
Marc'hadour tolenco  
Kartenco, monaiter  
A chansonsonnio a werzen  
Ia, pa mije amzer.  
  
Marc'hadour bric a brac  
So anvet merseri  
A pa vije hir an nos  
Me a re komedi.  
  
Voeajet meus Bretagn  
En ker a var ar mes  
Gant ma vilosiped  
A ma marc'hadourez.  
  
Vel se on deut aben  
Da c'honit ma fortun

En eur lezel ar boësson  
Ar merc'het hag ar butun.  
An nep a neuz è c'homposet  
Zo e ano Jean-Louis.  
A zo gannet e Plestin  
Kichen Toul-ar-Hiry.  
E ano pen da ben  
E Jean-Louis Guyader  
A ra e zemeranç fix  
En paroz Treduder.  
Breman e neus choajet  
Eur vichér ar vrava  
Pa ve skuis o labourad  
A chom da ziskuiza.  
Ones so eur vicher  
Ag am gra disouci.

Vank din met eur Varijeann  
Kontant da zemezi.  
FIN  
Peder mestres a meus bet  
A oa deus a Dreguer  
Mes iaouankic a oant c'hoas  
Na Ouient ket o micher.  
Iaouankic a oint c'hoas  
Ouient ket o micher  
C'heink gant losten o c'hivis  
Da disken ar goter.  
Un a ne so Perrinic  
Ag eben Mari-Jeann  
Unan al so M'li-Louise  
Ag eben Ma... nn.

Na c'houlan ket diskleria  
Piou a c'he reze  
Un anhe e meus klèvet  
A spisse ne guele.  
Ag unan al anheze  
A blije din er fad  
Ag ones a mije bet  
Peneverte e zad.  
An diou al a meus klèvet  
A blije d'e guinardant  
Se so kos din c'hon chommet  
C'hon chommet pot yaouank.

Propriété réservée :

GUYADER Jean-Louis,  
Pré le Bourg Plouray.

# CHOM EN BREIZ-IZEL

VAR DON : Er Finister ez on bet ganet...

Kinniguet d'ar marc'het yaouank a c'hoanta monn da Bariz.

Plac'hik yaouank, perag ta tec'hel  
Pell dimeuz da vam ha da dad ?  
Perag kwitad da vro Breiz-Izel,  
Elec'h out evuruz ha mad ?...  
Ankoua ar c'heriou,  
Gand o falz-madou ;  
Enne lec'h madoue kavfez trubuilhou .  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Ar c'heriou a zo sun a anken  
D'an dud zo enne divroet ;  
Lenn ar e halon, a zo yen,  
Karante wirion han euz ket  
Iroug ha kasoni.  
An holloch en em daga, en em dibri...  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Pell diouz da vro kollfez da c'hlanded,  
Koll rafes ive da furnez,  
Da yec'hed, da nerz ha da c'hened,  
Ha da vrud vad a Vreizadez ;  
Goude en dizro,  
A vo c'hoaz daero :  
Ar furnez kollet na deu morse en dro !  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Da dad, da vam baour zo o ouela,  
En o daoulagad daerou kri...!  
Piou a roio d'e eun tam bara ?  
Ha piou a harpo o c'hozni ?  
'Glevez ket o mouez,  
A lar hep paouez  
D'id gant karante ha gant kalz a furnez :  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Petra eta c'hoarve diez lalon,  
Ma kwitaez eut vrc ... kwan...  
Petra c'hoantaez, lavar hep aon,  
Lavar breman hep nec hamant ?  
Evidout, me gred,  
Breiz a zo bepred  
Eur vro ar gwellan a ro ebarz ar bed,  
O chom en bro gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

An douar a roaz d'az tadou  
Eur bevanz frank mad ha nerzuz,  
A roio did, enpad da zeiou,  
Magadurez krenv ha yac'huz ;  
Bez eta dinec'h,  
Gant poan da ziouvrec'h  
E vrevi en Breiz gwelloc'h pell'vit neb-lec'h !  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Na gwita ket da douriou uhel

Kizellet tra dantelezet,  
En pere ar c'he leir en avel  
A zon goueliou hon zent karet,  
A lid pardoniu,  
A gan eurejou,  
Hag a lavar d'id dre hekleo o moueziou.  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Na gwita ked bro da Gendadou,  
Bro ar giziou koz ha fur,  
Bro ar chapeliou, ar c'halvariou,  
Bro peb frankiz leun ha distur ;  
Bro ar soniu kaer,  
Ar gwita ked bro da Gendadou

A ziston bemnoz a drenz d'on farkeier...  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Chom da veva en ez traquennik,  
Elec'h m'eo zavet da di plouz ;  
Elec'h ma c'hoariez, bugalik,  
Seder ha pell demenz peb trouz...  
Kar da venou,  
Da lann, da goajou,  
Gante e klevi dre vmez an aveliou :  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Chom da veva en harz an iliz,  
Elec'h ma'z out bet badezet,  
Kichen ar vered lec'h ma tiskwiz  
Da gerent koz peh zo marvet,  
Ha neuze ive  
E c'hallou goude  
Diskwiza gante, barz an hevelep be :  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Peb trafen Breiz, sed ad'hanoùd  
Da chom en o c'hihen, n'o zouez  
Chilaou ane, holl o deuz galloud  
War da galon a Vreizadez...  
O kaeran peden  
A laront dan den,  
A c'hoanta kwitad e vam-vro da viken :  
O chom en bro da gavel ! { Diou wech.  
Chom, chom en Breiz-Izel ! { Diou wech.

Kas peh diouzid ar sonj divalo  
An euz trubuillet da spered,  
Chom breman da veva en ez pro,  
Enni'z po levenez bepred  
Lavar eveldon,  
A griz da galon.

Ma klevo Breiziz hon c'hân kaer a gwirion :  
Chomomp en bro hon gavel ! { Diou wech.  
Chomomp en Breiz-Izel ! { Diou wech.

AR YEODET

Centre : vers d'un timbre de 0.25 j'adresse à qui on fait la demande une chanson